

KANTICOU LORETA

~~Programme~~
HISTOR AR CHAPEL.TON : *Elet eus ar barados.*

I

E kichenic ar ster vras, 'tre daou venez huel,
 En amzer gos on tadou d'oa savet eur chapel ;
 Savet eur chapel vian d'an Intron Varia,
 A roet o devoa dezi 'vit hano Loreta.

DISKAN.

Chapel Intron Loreta zo savet a nevez
 Savet gant tud Plogonec, francoc'h var ar menez,
 Pedomp Mari gant fizianz, pedomp evel gueich all
 E c'halon n'e ket sarret, nac'e breac'h et de fall.

II

Piou n'en d'eus ket clevet com's eus al leac'h santel-ze,
 E voa digasset ennan eus a vro ar Jude,
 Ti an Intron Varia, dre zaouarn an Elet,
 Gant aon teuje d'en pila arraj ar baianet.

III

A veac'h ma voa digouezet e bro an Itali,
 An ti voa chomet ennan, Jesus, Joseph, Mari.
 Ma veljes o c'hourvezout ker buan miraclou :
 Dorn Mari a vez atao prest da scuilla grasou.

IV

Evit guelet ar burzud, 'vit pedi ar Verc'hes,
 Ar paour guita e lochic, ar brinset o fales :
 Oll e tistroont d'ar ger eürus a laouen ;
 Dezo oll en deus Mari selaouet o feden.

V

Evit plijout da Zoue, 'vit anaout e c'hrasou,
 An den n'eus bet a viscoas roet lod eus e vadou :
 Ti an Intron Varia gant aour voa goloet,
 Ac eun Ilis ar c'haera en dro e voa savet.

VI

Ar vrud eus a Loreta a zeuas betec Breis,
Calon ar guir Vretonet en recevas gant feis ;
Meur a hini a bede Intron al Loreta ;
Mes n'en doa chapel ebet⁸ en draonien zouar ma.

VII

En Aotrou deus Rubian , breman zo daou c'chant vloas ,
A voa o vonet da goll o treuzi ar ster vras :
Intron Loreta, 'mezan, mirit ma vin beuzet !
A kerkent en em gavas ar ster gantan treuzet.

VIII

Neuze clevas an Elet el leac'h binniget-se,
Eur beden o deus clevet kel-lies gueich goude,
Peden garet ar Verc'hes, an *Ave Maria*,
Lavaret a greis calon d'an Intron Loreta.

IX

En neubeud miziou goude, evit pea e zle,
An Aotrou 'reas sevel eur chapel er plaç-se,
Evit ma alje an oll anaout galloud Mari,
'Vit ma teuje peb unan gant fizians d'e fedi.

X

A dra ma voa bianic ar chapel voa savet,
Mari a zescas anat e plije dei meurbet ;
Ne voa nemet ho goulen evit caout e grasou :
Puill a stanc e tiskennent evel gliz an Envou.

XI

E peb leac'h voa Loreta anavezet 'bars pell,
A bep tu e tiredjer da bedi er chapel,
Kement a dud a zeue, mar des bet lavaret
E vije a bep seiz vloas eun treujou diruset.

XII

Ni zo evel on tadou guir vugale a Vreis,
Bepret leal or c'halon, bepret stard en or feiz,
Bepret dreist oll da Vari, rouanes an Envou,
A prest bepret da zoubla or glin n'e Ilisou.

9° 10 bis

Roganes

CANTIC

D'AN

INTRON VARIA LORETA

(TON : Ni o salud Rouanes an Elet)

I

C'houi eo sicour ar re a ia da goll ;
C'houi eo, Guerc'hes, rouanes ar bed oll ;
An diaoul a gren pa vel o torn savet ;
Draillet n'on touez e laçou milliget.

DISKAN

Ni o salud Intron al Loreta
'Vit patrones eus an oll barres ma,
Mam da Jesus a mam ive deomp-ni
Ni o salud ac o car, o Mari.

II

O sonch ennoc'h e touça or poaniou ;
O coms diouzoc'h e trid ar c'halonou ;
Pa o pedomp on eus mui a fizianç :
C'houi eo, Guerc'hes, or joa, on esperanç.

III

Er vuez ma ne vemp nemeur laouen,
Re alies sko varnomp an anken ;
Pa n'ell o torn divarnomp en distro,
C'houi a ro deomp calon vad d'en receo.

IV

En draonien ma leun a denvalijen
C'houi a lugern evel eur stereden,
Evit digass sonch deomp eus or guir bro,
'Vit renta deomp essoc'h heur ar maro.

V

En Env e m'oc'h Guerc'hes carantezus
Var eun tron caer azet kichen Jesus.
N'o taoulagad ni a vel o calon
Prest da c'houlen graçou deomp a pardon.

VI

Or pec'hejou a zo pec'hejou bras,
Mes o calloud, Mari, zo brassoc'h c'hoas ;
Recevet 'peus oll galloud gant Jesus :
Ouzomp Guerc'hes ,o bezit truezus.

VII

N'on daoulagad lakit ar guir daelou,
Ar guir glac'har ebars or c'halonou :
Ma c'hellimp oll, d'or maro eurus,
Mont da velet en Env o mab Jesus.

VIII

En env eun deiz, en dro dezoc'h, Guerc'hes,
Or c'halonou leun eus o carantez,
Mam douç ! Mam vad ! Sicour ar bec'herien !
Ni o meulo eb n'em skuiza biken.